

Beaj

Beaj martoloded:

setu Bro Warok



Beaj ar vartoloded betek Haiti en ur dremen dre inizi all. Ur veaj 4 mizvezh anezhi.

Setu 4 martolod prest da vont da Haiti evit kas traoù d'ar vugale a zo o chom eno, evit an dra-se e vo ret dezho mont war vor evit tremen dre Inizi Kanaria, Gwadeloup evit erru da Haiti, an Azor hag ar Bermud. Ar veaj a bado en holl muioc'h eget 4 miz.

1) Buhez war ar vag

Prest da vont kuit:

War-lerc'h mizioù evit prientiñ ar veaj emañ aet kuit ar pevar martolod war vor.

Nicolas Cannon a zo erruet er vag gant dilhad, c'hoarioù hag all evit ar vugale a Vro Haiti!

Ar vag-se a zo pounner-tre. Ret eo kaout fiziañs er mekanik-se hag en dud o deus labouret àrnezhi.

A-raok mont kuit emañ bet Nicolas e penn ar gwern evit gellet kempenn ar benveg foto hag « ar c'hapter satellit ». Ar memes devezh o doa staliet ar gibell evit ar gazol 1000 litrad. Hag war-lerc'h bezañ sellet ouzh ar meteo o deus divizet sevel un eil lienn evit chom hep kaout diaesterioù gant an amzer.

«Da 8 eur noz e vez keginet gant Nicolas. Adal 9 eur noz betek 1 eur vintin e vez tro Dany ha Nicolas da evezhiañ (ober war-dro) ar vag, ha da 1 eur betek 6 eur vintin e vez tro Alain ha Yann. Ha peurrest an devezh a vez d'an holl d'ober war-dro. Debriñ a reont da 1e d'enderv, chom a reont Tost 3 deiz hep cheñch dilhad, kousket a reont gwisket prest da vont da labourat war ar vag kenkas ma savehe ur gudenn bennak. Pasaet 10 deiz er mor a-raok arru e Las Palmas 3 deiz a zo bet start evito doc'h kostez

Goulennoù

Penaos e rit evit en em walc'hif ?

Perak ho peus choazet mont da Haiti ?

Piv en deus bet ar soñj sevel « marin du monde » ?

aodoù ar Marok. Daou zeiz e Las Palmas a zo raktreset evit kemer boued ha prenañ litradoù kazol evit treuzañ ar meurvor Atlantel. D'ar 25 a viz Meurzh ez eus bet ur gudenn e kostez Arinaga ur gudenn gant ar blenier otomatek; setu bremañ tost 25 deiz e vânt rediet da vleniañ ar vag 24/24e . Ret eo dezhe divontañ ar c'heflusker evit kempenn anezhañ.

Pellgomzet o deus da skol Diwan Baod d'an 13/03/2012 evit keñverian buhez ar vugale gant hini an Haïtianed. Sellet a reont doc'h ar mor evit gouzout penaos emañ an dour. Debriñ a reont war ar pont pa vez brav an amzer! Bez eus kalz a zelfined er mor n'eo ket gwall vat ar boued ha n'eus ket a-walc'h a avel. Gi o deus bet ivez gwelladenn ur pichon beajour ha roet o deus dezhañ dour ha «quart quart breton» evit reiñ energiezh en-dro dezhañ!

Kendalc'h a reont get o beaj, ha tost erruet int er Gwadeloup! Lakaet o deus ur gemennadenn war al lec'hienn evit ar pichon. Pesketaet o deus hiriv un Dorade coryphène an 3 a viz Ebrel 2012»

.Ur martolod nevez er skipailh: Alain Molène, un den a zaspazh istri, en deus choazet mont war vag evit sikour gant ar vugale a vro Haiti. Ar pezh a ra bremañ 5 martolod war ar vag. Ur pezh mell pesk a zo bet pesketaet: Dany a zo deuet da benn a besketa un dorad bras kenañ.

*Ninnog Mona.S Fallaenn ha Mona.J
5vetB*

D'an 3 a viz Ebrel.